



Sant Herve, Guic'haran hag ar Bleiz e Chapel Itron Varia ar Menez-Hom.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Sant Herve

Niv. 71 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

MAE-EVEN 1954

SANT HERVE

Patron ar ganerien hag ar varzed

Mennad bras Bleun Brug 1954 eo rei da anaout gwelloc'h sonerez ha toniou brao hor bro Vreiz.

Ar sonerez hag an toniou-se a zo, hep mar ebet, etouez teñzorieu pinvidika an Arvor. Adaleg amzeriou pella o istor, ar Vretoned o deus bet ar vrud da veza an dud barreka da zisplega mennozioù ar galon dre werzioù flour, ha dre donioù kaer.

Ha ne lavared ket euz a Vreiz gwechall ez oa eur mor a gan ?



An holl a oar ive eo bet choazet **SANT HERVE**, abaoe pell amzer 'zo evit patron ar ganerien hag ar Varzed.

Netra souezus eta ma vez graet kalz brud en-dro d'ezañ, er bloa-mañ, da geñver gouelioù ar Bleun Brug.

Hor mignoned, aketus da lenn ar gelaouenn-mañ, o deus bet tro, ouspenn eur wech, da ober anaoudegez gant Sant Herve.

Gouzout a reont eo unan eus ar zent koz a zo bet, hag a jom atao, karet hag enoret ar muia en hor bro...

Disheñvel diouz kalz a re all hag a zo deuet davedomp eus an tu all d'ar mor, Sant Herve an abad dall, a zo bet ganet, hag en deus graet e gresk, war zouarou an Arvor. Kloza 'ra, evel ma lavar d'eomp an ao. Herve Calvez, e levr e vuhez, roll hir ar venec'h vras o deus diazezet ha savet manatioù ha parrezioù hor bro.

E gwirionez, daoust d'ar pegeit 'zo, m'eo aet eus ar bed 'mañ — eur pevarzek kant vloaz bennak — merkou e roudoù benniget a gaver c'hoaz stank dre bevar c'horn hor Breiz.

E ano a zo douget atao, a rumm da rumm, en darn vrasa eus hor familhou kristen. Lec'hioù diniver, bet brudet ha santelaet gantañ gwechall, a gendalc'h o'hoaz hirio da deuler en-dro d'ezo c'houez vat e vertuzioù...



C'hoant a zo deuet d'eomp gouestla an niverenn-mañ, en he fez, da batron ar ganerien hag ar Varzed, **SANT HERVE**, ha ne zebant bet dirannet diouz sklerijenn an douar, nemet evit gwelout skleroc'h ha dounnoc'h splannderioù an Neñv hag o lakaat da bara dirak spered e genvroiz.

Ar gwerzioù flour, a lennoc'h, a ziskouezo d'eoc'h e pebez mor a santelez, a vuzudou hag ar varzoniez e tremenas buhez Sant Herve ; diskouez a raint ouspenn n'eo ket aet c'hoaz da hesk ouenn ar Varzed e Breiz-Izel...

Ar pajennoù, a gavoc'h emañ war-lerc'h, a gan, en o giz, madelezoù Doue, a zo boaz d'en em servich eus ar pezh a zo dister dirak an dud evit ober traoù bras...

O sellet outo c'houi a welo, da genta, e zourn galloudus o renka pep tra hag o ren an eil war-du egile **HERVIAN** ha **RIVANON**, an daou zen yaouank, a dlle beza tad ha mamm Sant Herve.

Gwelet a reoc'h penaos e vo lusket ha savet ar bugelig dall ; penaos, goude beza dastumet e-leiz a furnez, e ouezo skolia ha kentelia ar re all d'e dro...

Erfin(c'houi a welo penaos, goude beza bevet muioc'h evel eun ael, eget evel eun den, eo nijet e ene kaer d'ar baradoz.

Pedennoù ha kentelioù a glozo brao bras ar pezh labour kaer a lakomp bremañ dirak ho taoulagad.

L. B.

Lennit « Bleun-Brug », bep miz. Koumanant bloaz 500 lur. V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finistère. C.C.P. 544.22 Nantes.

BLEUNIOU SANT HERVE

Savet evit Bleun-Brug Leon e Lokournan (7-6-54)

gant SAIG AR GOV.

Kinniget gant Anaoudegez vat d'an Aotrou « Visant Seite » ha da holl skoazellourien ar Bleun-Brug.

J.-F. Le Goff.



RAKLAVAR

O Barz !
Goulenn a rez diganin,
Digant-me denig a netra,
Sevel eur raktavar
D'an dornad bleunioù dispar
A ginnigez amañ warlerc'h
Da Sant Herve, ar Barz gwerc'h.

Petra ' lavarfen-me, avat,
Pa n'ouzoun c'hoari taken
Gant an delenn.
Dindañ va bizied kropet
Ne ray ar c'herdin mibin
Nemet yudal
Disingal.

Klask a rin, evelato,
O Saig ar Gô !
Meuli hervez va distervez
Da oberenn gaer.
Ganti e klevet c'houez dudus
Ar bleunioù frondus
A gutuilher a dorkadou
En hon horzou
War c'hlizenn strink an nevez-amzer,
Pa gan lizhin an eostiged
Kag ar moult'h
E-mesk an delioù
Hed ar c'hili.

Kana ' rez, kana ken flour,
Evel hiboudig an dour,
O vera boull ha seder
A-dreuz ar beler
War ar bill.

Kana ' rez ar barzig dall
Vel ma kane-ken gwechall,
Ne ' sonj d'in.

Nag eo plijus mont ganez
Da heul ar zant,
Eus e gavell badeziant
D'e gavell-bez !

Nag eo frouezus ar c'hentelioù
Hedet ganez a-vernioù
Hed a-hed da werzennoù !

Ra vo al levrig-mañ
Kentellet ha studiet
Er skolioù.
Ra vo lennet ha kanet
Gant ar yaouankizoù.
Ra vo kentelioù Sant Herve —
Ar zant a welas dirazañ
Digor-kaer ar Baradoz
Deiz ha noz,
E-keit ma c'hôme e zaoulagad
Serret kloz
Da viloni an douar —
Eun elfennig a nerz
D'ar re a gerz
War e roudoù.

Ra vezo da Vreiz
Eur sklerijenn
Ma skedo enni ar Feiz
Da virviken ;
Ma vezo ar Vretoned
Leal bepred, tud a galon,
Breiziz, penn-kil-ha-troad
Evel mab Rivanon.

Laouenanig Breiz (V. Seite).

BLEUNIOU SANT HERVE

E lignez an dud-se,
« Tadou ar feiz » e Bro-Leon
E kavomp sant Herve,
Mab brudet Rivanon
Breizad, bet ganet war-dro Gwitevede,
Manac'h, hag a varvas e bro Lanhouarne,
Barz, gwerzenner dispar « Kantig ar Baradoz »
Sant, hag a bedomp c'hoaz, evel hon tadou koz,
pa vennomp kaout eur skoazell
da viret e Breiz-Izel,
Ar feiz, ar Brezonneg, gant hor gizioù kristen,
An teñzor da zifenn a-vremañ da viken.



Hervian hag a vo tad Sant Herve, a zo bet ganet e Breiz-Veur deuet da veza Bro-Zaoz. Emañ e lez ar roue Childebert, e Bro-C'hall o kana hag o seni gant an delem. C'hoant a zeu d'ezañ da zistrei d'e vro. Araok ez a da Vreiz Izel el lec'h ma 'z eus deuet da chom Bretoned eveldañ. Eno, dre eun huñvre, Doue a ro d'ezañ da c'houzout e tle dimezi gant eur plac'h koant anvet Rivanon, a en em ziskouez d'ezañ dre e gousk.

HUNVRE HERVIAN

« Ma teu d'in pep huñvre
« Eus ho perz, va Doue,
« Grit ma ne vezin mui.
« Touellet gant hini. »

(Pedenn Hervian.)

Epad meur a vloavezh, Hervian, telenner,
Barz, Breizad, ha kaner,
Kentoc'h eget plega d'an enebour garc,
Ne leze war e lere'h nemet spont ha maro,
En devoa kavet gwell, beza eun divroad,
Daoust m'eo kriz an harlu, siwaz da bep oad !
E palez ar roue, du-hont e Bro-C'hall,
Digemeret oa bet gant doujañs ha gant mall.
Kristen eus an dibab, desket bras, spered lemm,
Hervian d'ar mare n'en doa ket tro da glemm.

Karet oa gant an holl,
Mestr ar c'han, ar c'heroll...
E delem koulskoude
Hirvoudus a dride.

Rak spered ar Breizad, war eskell an avel,
A nije dreist ar mor da vro goz e gavell.
Kerkent en e galon e tiwan eur menoz :
Distrei d'an enezenn da bedi deiz ha noz,
Evit e genvroiz e gwask eun enebour,
Distrei, du-hont da Vreiz, da gas d'ezo sikour...

Da bep labous e neiz,
Da bep kristen e feiz,
Da bep Breton e Vreiz.

Setu kredenn ar barz, e palez ar Roue,
Setu galv e galon, e bedenn da Zoue.

Met pa ziskouez e sonj e klev an holl raktal
O kemenn d'ezañ chom... Nann ! Nann ! n'hell mui gedal !

Gant asant ar Roue, Hervian a zistro...
Na laouen eo bremañ dre ma wel e c'hello
Beza manac'h eun deiz... Araok treizi ar mor.
E fell d'ezañ gwelet Bretoned an Arvor.

Plijus an digemer

'Zo graet d'an telenner,

Gant e holl genvroiz a stourm evit sevel
Amañ, eür vro nevez a anvint Breiz-Izel,
Hag a vezo brudet dre youl he Bugale,
Tud kalonek ha kreñv, tud a zoujañs-Doue.
Tenn e kavo, moarvat, lavaret kenavo
D'e vreudeur Bretoned : pep kimiad zo garo !...
Warc'hoaz emañ an deiz, al lestr a zo kavet...
Hervian en Drenneg, en em ro da gousket... (1)

Hogen, war zremm ar barz
E tremen eur mousc'hoarz.

Daoust ha ne wele ket,
Dirazañ o tiskenn,
Eur plac'h seder meurbet,
En he dourn eur rozenn ?...
Daoust ha ne glevet ket
Ar plac'h o kana :
« Evidon da veza netra,
« Netra nemet, siwaz !
« Eun elestrenn 'us d'ar waz,
« Eurur oun me, emzivadez,
« Evel eur rouanez. »

War zremm ar barz neuze
Eur mousc'hoarz a rede.

Daoust ha n'eo ket hen a respont
D'ar plac'h yabuank a gan du-hont :
« O rouanez, me ho ped,
« Kutuilhit d'in eur boked.
« Eur boked par d'ar rozenn
« A zougut en he foun gwenn. »

Hogen ar plac'h a vouskanas
En e gichen pa dremenas
— « Aotrou ne ginnigin boked
« Nemet d'an den 'vo va fried. »

Hag ar verc'h a dec'has...
Ar mousc'hoarz a deuzas...
Ar barz a zihunas...

(1) Parrez aa Drenneg e kichen ar Folgoad.

Hag e sonjas el le
En doa graet da Zoue,
Da jom hep dimezi.

Ne wel mui koantiri
Ar plac'h a gane ge !
Dirazañ o tiskenn,
En he dorn eur rozenn.
Kenavezo huñvre !...
Hag e kousk adarre...

Hogen war zremm ar barz,
E nijas eur mouse'hoarz.

Daoust ha ne wele ket,
Eur paotr skedus meurbet,
Daoulagad flamm d'ezañ,
Daoust ha ne glevet ket
Ar paotr o komz outañ ?

« Deuet oun, Hervian, eus bro gaer an aelez
« A gan meuleudiou da Jezuz o Roue,
« Deuet oun da c'houeza tan eur gwir garantez
« En da galon dinamm bet gwestlet da Zoue.
« Ar plac'h-se bet gwelet en noz-mañ, dre huñvre,
« A vezo da bried, ha zoken hep dale...
« Kerz, hep strafuilh, betek he zi,
« Rak, galvet out da zimezi. »

Hag ar paotr a dec'has...
Ar barz a zihunas.
War e zremm koulskoude
Ar mouse'hoarz a nije !...

AN DIMEZI

An heol a lintr en oabl... Al laboused a gan.
Pebez dudi selaou da vintin, o meulgan.

Flouret gant an avel ar geotennou a gren...
Er prad ar ster a red, a red, a red laouen.

Hervian strafuilhet dal ma soñj en huñvre,
Evel ar geotennou a gren, a gren ive.

Evel ar ster e red, kerkent ha goulou deiz,
Da glask ar bennherez, koulmig kludet e Breiz.

Demdost da Lan-Nuzan, d'ar feunteun o tiskenn
E kavas ar « goulmig » en he dourn eur rozenn.

Ar « goulm » oa Rivanon, c'hoar yaouank Rivoare,
Eun den eus an dibab, ha mat e pep doare.

Hep klask digareziou, Hervian gant douster
A gontas an huñvre, d'ar plac'h o vont d'ar ster.

Hogen dre ma komze kalon glan Rivanon,
A domme tamm ha tamm ouz tan flamm e galon.

Hevelep gourc'hemenn he deus klevet ar plac'h,
Pa gutuilhe bleuniou war bord hent Kastel-Ac'h.

Gwelet he deus ive goulaoen an eured,
Hag eun ael o kinnig he dourn gwenn d'eur pried.

« D'eoc'h, eme Rivanon, e roin ar rozenn
« A zougen-me em dourn, d'ar feunteun pa gerzen.

« Ar pried a welen n'hell beza nemedoc'h.
« Renit war va c'halon pa 'z eo graet evidoc'h. »

Hag an dourn a zouge betek-hen eur rozenn
A zóugo, da viken, kalc'hig aour walenn.

Eur beleg a skoulmas, en eur chapel vihan
Kalon glan Rivanon ouz kalon Hervian.

....

Ha maner Lanrioul, maner he zudou koz,
A zo bet eur pennad... liorz eur baradoz.



EUR SANT DALL

*Hervian a lavaras d'e bried yaouank : « An eal en deus prometet hon devezo
eur mab. Hen a vezo nerz hag enor ar bobl kristen... »*

*Rivanon a respontas : « Ma tleañ kaout eur mab, ra vezo dall. Setu ar bedenn
a ran d'an Doue holl c'halloudek ».*

*Hervian a reas eur bedenn all : « Roit, o va Doue, d'hor mab ar c'hras da
welet epad e vuhez ar baradoz digor dirazañ... Ha diwar vremañ e troan kein
d'ar bed. »*

Doue a selaouas pedenn an tad hag ar vamm. Hag Herve ne welo ket :

Pegen kaer ar bleuniou,
Bleun lirin ar maeziou.

Pegen skedus an oabl gant an heol o para,
Pegen lintrus al loar pa vez en he c'haera.
Hed-ha-hed ar steriou a dreuz ar prajeier,
Herve ne c'hell ket, redek el lanneier
Warlerc'h ar C'houiled-aour, na warlerc'h an evned.
Ar mab ne welo ket skeudenn e vamm er bed.
Ne welo ket ar balan lusket en avel,
Ne welo ket an tarz o sevel en dremwel,
Araok dont ouz ar roc'h da vervel gant safar.
Met Herve daoust m'eo dall a wel traou hep o far.

PETRA WEL HERVE ?

Emañ war e zek vloaz
Mab santel Rivanon.
N'en deus ket gwelet c'hoaz
E maeziou Bro-Leon.
An ed o tarevi
Hed-ha-hed an irvi...
Kaeroc'h ar pezh a wel !...
Pa zesk an aviel...

Gwelout a ra neuze,
Gwelout a ra Doue
Gant E vab eternel
Hag ar Spered Santel.
Bugale diniver
Tro war dro d'ar Zalc'her
Gant o sac badiziant
O nijad skañv ha drant.

Met n'eus ken nemetañ a c'hellfe lavarout
An holl draoù kaer a wel ha n'hellomp ket tizout.
Rak, n'eus nemet eur zant o c'houzout petra wel...
Hag o c'houzout da vad zoken pa vez bugel
Pegen fur, pegen c'hotiek eo lakat ar fiziañs
E madelez Doue hag en e Brovidañs.

✱

*Traou souezus a lennomp e buhez ar zent, a-wechou, adalek o bloaveziou
kenta. Daoust ha kement-all a gaver e buhez Sant Herve krouadur ?
Selaouit, ha klaskit gwelout galloud ha Madelez an Aotrou Doue.*

FEUNTEUN SANT HERVE

Edo mab Rivanon, o kerzout, eun dervez,
Hentehet gant Guic'haran, betek bourg e barrez...
O klask mont buanoc'h
Ar paourkez Herve war an hent
A gollas unan eus e zent,
E kichen eur roc'h.

An dud o labourat er parkeier
A welas eun tan gwall el lanneier...
Eun tantad burzudus
Gant flammou souezus...

« Arabat eo kaout spont,
Eme mab Rivanon
D'ar bugel, e vignon,
« Met, kerz betek du-hont,
« Rak, du-hont pelloc'h,
« Emañ va dant ouz ar roc'h...
« Lugernus eo... du-hont... »

An dour a zivere diwar dal Guic'haran,
Pa zegouezas en dro, an dant en e zaouarn.
Eur feunteun a glaskas da derri d'e zec'hed,
Tro-war-dro ne gavas na feunteun na dour-red...
War bord an hent, gant e benn-haz,
E reas, Herve, sin ar groaz.

An douar a frailh
Hag an dour a sailh...
Ar dour a red atao, el lec'h benniget-se,
Eus ar feunteun anvet : Feunteun vat Sant Herve.

*Alies e weled Herve o vont en hentchou. Guic'haran a gerze d'e heul. Eun
dervez, e treuzent eur geriadenn, ha bugeligou, o tiwall o loened, en em lakeas
da ober gwap outañ. Siwaz d'ezo !*

KORRIGED SANT HERVE

Kaer he devez eur vamm poania gant he bugel
N'hell ket mirout atao na vefe penn-avel,
Rak, siwaz ! labour an diaoulou
A zispenn labour ar mammou.

Hag eun devez eta, bugale, pennou fall
A gredas ober gwap ouz Hervieg an dall.
« Dallig, emezo, lavar d'eomp
« Pet vi koukoug a zo ganeomp ?
« Dallig, dallig, gwell eo c'hoari
« Eget koll amzer o pedi. »

E kalon c'hlan Herve, n'oa nemet madelez
Prest oa da bardoni d'ar baotred didruez.
Gant glac'har, a-berz Doue
E lavaras koulskoude :

« Nemet keuz ho pefe d'am beza gwall-gaset,
« Holl gant justis Doue c'houi vezo kastizet.
« Daoust ma n'ho kwelan ket, e welan siwaz d'eoc'h !
« Gwialenn ar c'hastiz o tont da skei ganeoc'h.
« Koz e c'hellit beva...
« Bras n'hellit ket beza,
« Abalamour d'ho pec'hed
« E chomoc'h kornandoned. »

Ar varzed hag hon tud koz
A gont e weled, diouz an noz,
E kreiz al lanneier, ouz kern ar meneziou,
Hag el lec'hioù gouez a gaved er maeziou
Korriged o tansal
O lammet, o fringal
En eur gana kenetrezo
Kanaouennou garo.

...

Ar re-mañ eo marteze
Korriganed Sant Herve ?



*Rivanon a gasas he mab da skol eur manac'h, hanvet Arzian, eun den goui-
ziek ha Santel, bet eur pennad e bro Iwerzôn er skoliou renet gant diskibien
Sant Patrig ; — eno Herve a dremenas seiz vloaz o studia ar skiantehou kaera,
ha kan an iliz. Deski a reas, ouspenn, penaos pignat uheloc'h bemdez war skeul
ar santelez. Rivanon, en em dennas en eul leac'h distro, « pell diouz trouz ha
safar ar bed ».*

SANT HERVE E SKOL ARZIAN

Hed-ha-hed an hent bras, al laboused a gan.
Epad ma kerz Herve gant e gi dirazañ.

E tal ar skol pa zigouezas
Ar c'hi kreñvoc'h-kreñv a barzas.

Hag Arzian da zont prim er-maez
Da zigemer an emzivad kaez.

Da zigemer an emzivad
A zeu d'ar skol a galon vat.

An emzivad a zeu d'ar skol
En dro d'e benn eur rodig-heol.

Eno pell diouz an trouz desket en deus Herve
Skiantehou talvoudus, ha servicha Doue.

Pegen eurus en deus bevet

Mab Hervian.

Epad ar seiz vloaz tremenet

Gant Arzian !

*Peur-echu gantañ e studioù e skol Arzian, mont a reas Herve da gaout e
genderv Urfol, a veve d'ar mare, en eur gouent en eur c'horn eus ar c'hoad-
Douanna, er Vourc'h-Wenn. Eno e virer c'hoaz, e relegou, war a lavarer.*

E KOUEM SANT URFOL

Hogen a-berz Urfol, kenderv mab Rivanon,
E tigouez eur c'helou hag a wask pep kalon.
Galvet eo bet Herve da vont, hirio, zoken
D'al lec'h m'emañ Urfol, war leaned... o ren.

Dre ma red ar c'helou, e teu ar yugale,
Ar venec'h, o mistri, da vriata Herve.
Beuzet en o glac'har e sonjent gant dudi
En deiz m'oa deut Herve da gomañs e studi.

Bremañ o lavaret kenavezo
An holl a skuilh e puilh d'aelou c'houero :
Daelou ar garantez
Daelou ar santelez !

Hon tad a zo en neñv, zo ken bras e veli
A ro pa fell d'ezan, pare da bep gouli.



Kanerien Lokournan o kana meleudi Sant Herve

PHOTO JOS LE DOARÉ

EUR C'HELOU MAT

Urfol, er mintinvez-se

D'e genderv a lavare :

« Arabat eo kaout keuz da skolig Arzian.
« Evidoc'h ar skol-mañ a gaven re vihan.
« Arabat eo keuzi ! Bezit seder, kentoc'h !
« Rak, eur c'helou laouen, am eus bet evidoc'h.
« Dre vadelez Doue gouzout a ran ervat
« E karfe Rivanon dont d'ho kwelout timat.

« Goude beza roet d'an dud paour he danvez,
« Douget he deus ganti hadenn ar santelez,
« Betek an tamm lochenn a ro d'ezhi goudor,
« E gwask eur c'hoad, du-hont, e kichen ribl ar mor.
« Eno gant Kristina, plac'hig santel meurbet
« E ra gwir binijenn ho mamm muia karet. »

— « Daoust ha ne c'hellfec'h ket, eme Herve, kerkent
« Dont ganen d'he lochenn, pe c'hoaz diskouez an hent
« D'am blenier Guic'haran ? »

— ...« Nann ! Nann ! eme Urfol

« Aon am eus na deufec'h er c'hoadou d'en em goll !

« Epad ma vin en hent

« Beilhit war ar gouent.

« N'eo ket labour a vank, p'emañ deut ar mare

« Da rei d'hon douarou greun an eost adarre.

« Herve, kenavezo, pedit mat evidon

« Ma kavin, hep dale, peniti Rivanon. »

Emañ Urfol en hent, Urfol an den santel
Skouer an holl leaned a stummas Breiz-Izel.

*Nag a draou souezus a lennomp a wechou e buhez hon tadou koz, e buhez
ar Zent a ziazezas war douar an Arvor eur vro nevez, hanvet Breiz, Epad m'edo
Urfol gant e gefridi, setu petra zigouezas eun dervez.*

BLEIZ SANT HERVE

Savet eo Guic'haran, rener hor manac'h dall...
War e zaoulin e ped, evel ar venec'h all.
« Doue, krouer an nenv, ar mor hag an douar,
« Ho kalloud a zo bras ho madelez hep par.

« C'houi hepken a laka

« An hed da gellida.

« D'an den e tigasit ar glao hag an dommder.
« O labourat hepdoc'h, e koller an amzer.
« Evit ma vo frouezus, war va devez labour,
« Skuilhit gliz ho pennoz roit d'in ho sikour,
« Ha bennigit ouspenn ar paourkaez penn-azen
« A ginnig d'in e nerz evel eun aluzen..»

Eun drugar eo gwelout, du-hont bed an ero,
An azen, ar manac'h dindan an heol-bero...
Diwar dal Guic'haran, ar c'houezenn a ziver,
Hag ar paourkaez azen a zo gleb-teil e lèr...

Du-hont e penn an hent

E tint kloc'h ar gouent.

« Hop ! eme Guic'haran, mall eo d'in mont d'am lein,
« Ha deoc'h c'houi va mourrig mont da zec'ha ho
kein ».

An azen disterniët a lez eur ruadenn,
A stag da hinnoal ; eur pennadig warlerc'h,
E red betek ar prad, da glask eun tamm merenn,
Ha da ruilhat e gorf evit gounit e gerc'h...

Lonket gantañ e lod glasvez
Edo warnes mont da c'hourvez
Pa welas eur bleiz, lemm e zent,
O tont er prad diwar an hent.

Dal ma sañt an azen, astennet dibreder,
E chom krenn a-sav, e pleg e zivesker,
Hag e lamm gant imor war gein an azen kêz
A glak en em zifenn ouz ar bleiz didruez.

Ar gwad a ruilh a-builh... Emañ ruz al leton...
Rak, skilfou hir ar bleiz a groge donnoc'h-don...

Guic'haran a zired, dal ma klev ar stourmad :
Re ziwezat, siwaz !... Trumm oa bet ar c'hrogad.
Hogen, mouez Guic'haran, douget gant an avel,



A zeu betek Herve, daoulinet er chapel.
« Ar bleiz ! ar bleiz ! ar bleiz ! Lazet hon azen paour !
« Hon azen ! hon teñzor, hor gwella servichour ! »

« Arabat d'it leñva, va breurig Guic'haran,
A respontas Herve, dal ma voe dirazañ,
« Ar bleiz a jomo doñv, hag e plas an azen
« E labouro hiviziken. »

Evel ma komprenfe

Petra ' lavar Herve,

— An dra-mañ n'eo ket eur gaou, —
Ar Bleiz a redas d'ar c'hraou.

Ep ad meur a vloavez, o na kaera burzud !
Eo bet gwelet ar bleiz o vont e-touez an dud,
O vont d'ar parkeier, da ziwall an deñved,
Da sikour Guic'haran da labourat ouz red !

Ep ad meur a vloavez eo bet gwelet ar bleiz
O vont da heul Herve, koulz en noz hag en-deiz.
Gant an holl ' oa karet
Eürus en deus bevet !

Keit ma vezo mammou, keit ma vo bugale,
E Breiz e vo kontet istor bleiz sant Hervé.

*Urfol en deus kavet Rivanon en eul lochenn, e kreiz eur c'hoad. Eno e rend
eur vuhez eus ar re strisa. War ali Urfol e teu da lavaret kenavo d'he mab.*

KENAVO, MAMM !

Setu Herve, bremañ, dirak e vamm garet.
Seiz vloaz a zo, pe dost, n'en deus ket he gwelet.
Hag e tride kalon ar vamm
Dirak he mab, ken dinamm.

Epad meur a zervez,
Na pebez levez !

Met pa deu ar mare
Da vont kuit adarre,
Da zistrei d'he lochenn
Rivanon a c'houlenn :

« Me garfe gouzout arôk mont kuit,
« Petra diganen a c'hortozit ? »

Herve kerkent a respontas :

— « Va mamm garet, a ! salv ho kras
« Goulennomp bremañ deiz ha noz
« M'en em welimp er baradoz.
« Nag eürus e vezimp neuze
« Skedus e sklerijenn Doue !
« Kenavo, mamm, kenavezo ;
« Er baradoz me ho kwelo ! »
Ar vamm a gerzas gant an hent...
Ar mab a jomas er gouent...

Pegen seder an dud a feiz !
Ra vezint stank war douar-Breiz !

*Rivanon a varvas eun nebeut derveziou goude beza lavaret kenavo d'he mab.
Urfol en em dennas e goueled ar c'hoad, hag a roas d'e genderv kement en doa :
e beniti, e skol hag e skolidi. Eno e chomas Herve da gelenn epad tri bloaz.
Selaouomp darn eus e genteliou.*

E SKOL SANT HERVE

A dreuz ar c'hantvedou
Setu c'hoaz e gomzou :
« An neb ne zent ket ouz ar stur,
« Ouz ar garreg a zento sur ! »

D'an tad, d'ar vamm e lavare
Penaos sevel o bugale :
« Gwell eo deski mabig bihan
« Eget dastum madou d'ezañ. »

D'an dud yaouank e genteliou
A zesk karet o labouriou :
« An den yaouank en diegi
« A zastum poan war benn kozni. »

D'an holl e tesk ar pedennou
A ro gwir nerz d'ar c'halonou :

« **Teurvezit Doue, va diwall,**
« **Diouz hud, ha diouz heg ha diouz gwall,**
« **Diouz louarn, diouz bleiz, diouz ael-fall.** »

Sentomp ouz sant Herve, hag evel hon tud koz
Goude buhez santel e kavimp baradoz.



*Diouz ma welomp Sant Herve a gemere kalz preder gant an dud a veze war
e dro. Ar vugale dreist holl a blije d'ezañ. Evito e kutuilhomp eur boked great
gant Aliou santel ar manac'h dall.*

SANT HERVE HAG AR VUGALE

Evel gwechall, o bugale !
Deskit mat kentel Sant Herve,
N'eus ket eun all talvoudusoc'h !
Kentel bet savet evidoc'h :

Bemdez e ped an evnigou
Kludet er c'hoad war o brankou
Evit preñvig, evit greunenn
E kanont prim eur ganaouenn

Pa zihunit en ho kwele
Roit ho kalon da Zoue.
Grit sin ar groaz, larit bemdez
Gant feiz, fizians ha karantez :
« D'eoc'h e roan, o va Doue,
« Va c'halon, va c'horf, va ene.
« Grit ma vezin eun den a feiz,
« Pe mervel kent ma teuy an deiz. »

Pa welit eur vran o nijal,
Sonjit en diaoul ken du, ken fall ;
Ha pa welit eur goulmig wenn
Sonjit en ael-mat ho tifenn.

Ha pa gomzit ouz tud ho ti
Larit : va breur, va c'hoar, ha c'houi,
Komzit an eil ouz egile
Gant douster, evel ma tere.

« Benedicite » kent ar pred,
« Ha grasou warlerc'h gant aked. »
Boued marteze n'ho pezo ket
Ma ne sonjit o lavaret.

A barz mont en ho kwele-kloz
Larit ho pedenn diouz an noz.
Evit ma teuy aelig-Doue
D'ho tiwall betek ar heure. »



*Setu komzou eur Sant Breizat, d'ar vugale. Ma senter outo bremañ c'hoaz,
bleuniou ar santelez a vleunio e kalon paotred ha merc'hed Breiz... Hef dale,
e teuas Herve da veza brudet dre ar vro a-bez. Pa deuas eskibien, tud jentil,
menec'h, labourerien d'en em voda war gern ar Menez-Bre da stlapa ar roue
Konomor eus a reñk ar gristenien, ar manac'h a voe gedet eun dervez penn-da-
benn, ar pezh a ro da anaout an istim a vaged entañ, d'ar mare.*

WAR MENEZ-BRE

Dre vrud e santelez 'oa ken bras e c'halloud
Ma teued a bep lec'h d'e gaout e pep darvoud...
Hag eur bloavez, zoken, war dosenn Menez-Bre
Eskibien, tudjentil a c'hortozas Herve,

Evit barn Konomor, roue mat da genta,
 Deut da veza muntrer, ha den eus ar falla,
 Gant c'hoant beza roue, war holl zouarou Breiz.
 Ar mennad a blijje met an hent n'oa ket reiz...
 P'en em gavas, du-hont, ar paourkêz manac'h dall,
 Eun den war ar menez a gredas e damall...
 An den avat, raktal, a gollas ar gweled.
 Herve, madelezu, ha truezu bepred,
 A reas eur bedenn hag an den a welas.
 Warlerc'h ken bras burzud an holl a c'houlennas
 Bennoz ar manac'h dall, an den santel Herve.
 « N'oun ket din, emezañ. Senti ran koulskoude.

« Bennoz Doue ra gouezo,
 « A-vremañ war an dud
 « War al loened mud ;
 « Bennoz Doue ra gouezo
 « War an holl douarou
 « Ma vo puilh en eostou. »

Diwar neuze, dreistholl, a barrez da barrez
 E redas, hep ehan, brud vat e santelezh.



BLOAVEZIOU DIWEZA

Ma ne wel ket an dud e klev o goulennou, hag e kresk muioc'h mui niver e bedennou. E Lanhouarne, war douar Innok e savas eur manati. Eno e kentelie ar vened'h war skianchoù Doue. Deuet oa da veza « sklerijenn Bro-Leon », — hag « eun hader burzudou ». Met tremen a ra, an dud evel ar roz. Sklêz eo Herve. — Pe galvet eo gant Doue. Deuet war an douar wardro ar bloavezh 521... e varvas e 566, d'an oad a 45 vloaz... ar Breizad gwirion, ar Barz dall... an hini a anvomp Sant Herve... Bevomp en e gichen ar pennad diweza eus e vuhez bet ken talvoudus... pevarzek kant vloaz a vezo dizale...

E-keit ma kavo Breiz ar mor glas da c'houriz
 Ar feiz a vo donjet ha karet an iliz
 A e'houder relegou, teñzor Lanhouarne,
 Ar Breizad kalonek, ar barz dall, Sant Herve.



AR VAG A RED...

Galvet en deus ar zant e nizez Kristina
 Bet o vev gwechall e ti Rivanona,
 Hag a veve bremañ e kichen ar gouent.
 En eul lochennig paour, savet e bord an hent.

Ha d'e nizez kent ma varvas,
 An aotrou Sant a lavaras :
 « Tinaig, va nizez, aozit,
 « Aozit va gwele, ma karit.

« N'hen aozit ket e'lec'h boazet...
 « Nemet war an douar kalet.
 « Aozit-hen dirak an aoter,
 « Ma welin Jezuz, va Salver.

« Eur maen da benn-wele zo red,
 « Gant eun tamm ludu da c'hole'hed.
 « Ra vin em gourvez el ludu,
 « Pa zeuy d'ar stourmad an ael-du. »

Hag e respontas Kristina,
 Gant keuz ha glac'hare, o leñva :
 — « Mar deo gwan ho kalon
 « Va hini zo marv, o gwirion.

« Ma varvit c'houi, digant Doue,
 « Goulennit ma varv ive...
 « Ma 'z in ganeoc'h, e berr amzer
 « Evel ar vag war bouez ar ster... »

Ha d'e nizez ken glac'haret,
 An aotrou Sant en deus laret :
 — « Bezit laouen ha gortozit...
 A-benn tri dervez mont 'ralmp kuit.
 « Arabat eo leñva,
 « Gortoz a ran gant joa,
 « An termen diweza,
 « Ast an eus da welet,
 « Jezuz, mui a karet...

« O va Jezuz, o va Salver
 « Ar vag a red war bouez ar ster... »



TREMENVAN

Eun eskob a welomp stouet dirak Herve.
 E gomzou oa tener, hag e vouez a grene.
 Hennez oa Houardon, eskob mat Bro-Leon,
 Diredet d'ar gouant da sikour e vignon,
 Ar manac'h Herve da gwitât an douar...
 An dud ouz o selaou gant dudi a lavar :
 « Daou ael a gavomp ni, dirak hon daoulagad ? »

Met an eskob a sav, hag a-benn eur pennad
 E ra sin ar groaz da rei an absolvenn ;
 Prim goude d'eur mignon e roas an nouenn...
 Ha dirak Sant Majan, dirak Sant Konogan,
 Dirak eur mor a dud a bed holl evitan,
 Digan Sant Houardon, e resevas Herve,
 — O na kaera taolenn da welet en deiz-se, —
 Korf e vuia dindan spes an osti...
 An holl dud en iliz a leñve gant dudi...

Na laouen eo Herve !... Darn a lavar zoken,
 E c'heil gwelout bremañ koulz ha ma well pep dan...
 Met setu ma klevet eur c'han leun a zouster,
 Kanaouenn an aelez tro war dro d'an aoter...



KAN AN AELEZ

Torret da jadennoù,
Deus bremañ d'an neñvou,
Gant ar zent, an aelez,
A veul Doue bemdez.

Digor da zaoulagad,
Gwel eur vamm hag eun tad,
Deut da zigemeret
Jezuz muia karet.

Bet dall war an douar,
En eurusted hep par,
Da viken e veuli
An Doue... a weli !

An holl a leñv didrouz, Herve a stou e benn
Emañ nijet d'an neñv da gaout e gurunenn.
N'eus mui nemet e gorf war an douar kalet,
Ha tro war dro d'ezañ eur boblad tud glac'haret.

Didrouz an dud a stou dirak korf sant Herve...
Sant Majan a ganañ an oferenn goude.
Pa vennige an dud, beuzet en o glac'har,
Kristiana, dinerzet, a gouezas d'an douar :
Tremen ' reas e berr amzer.
Ar vag a red war bouez ar ster.

HON LE !

Mignoned ar « BLEUN-BRUG », greomp eul le santel :
Enoromp sent hor bro, gwir dadou Breiz-Izel.
Kerzomp war o roudou !

Yaouankiz hon amzer, daoulinit eur pennad,
Dirak o s'keudennou, klozit ho taoulagad,
Ha pedit gant evez.

Goulennomp holl ar c'hras da garout, da zifenn,
Ar bedenn, al labour, gant ar gwir binijenn,
Evel hon tadou koz.




Kanomp hed an hentchou, bremañ evel gwechall,
Gwerzennou sant Herve, ar Breizad, manac'h dall :
Kantik ar baradoz.

Jezuz, pegen bras vez,
Plijadur en ene,
Pa vev e gras Doue,
Hag en e garantez.

Saig ar Gov.

KANTIG DA ZANT HERVE

Refrain .. Paroles et Musique : D^r Dujardin .. Harmonisation : Abbé Arthur Goasdoue



Met bet oc'h bet digollet.
Beo, doriou ar Baradoz
D'eoc'h a zo bet digoret.
Ni, pec'herien, 'rank gortoz
Kaout hevelep joa en nenvou,
Ma valeomp war ho roudou.

Gant nerz, justiz ha karantez,
Dirak e bobl hag e lez.
Ho peus barnet ho Roue
Konomor war Mene-Bre.
An neb ne-zent ket ouz ar stur
« Ouz ar garreg a ray sur. »

Hor ger-stur zo Feiz ha Breiz.
Diouz dallentez ar spered
Kenteliou Furnez ar geiz
A viro ar Vretoned.
Mirit hor bro da vont da goll
'Touez reier hon amzer foll.

L. Lok.


Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697





En enor da Sant Herve, merc'hel Bro-Leon, deiz Bleun-Brug Lokournan,
o deus douget o dilhad kaera, ha kanet a greiz kalon meuleudi ar barz
santel.

PHOTO JOS LE DOARE



Bleun-Brug

Niv. 72 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

GOUERE-EOST 1954